

A. M. G. D.

DA ZANT PER

Ton : *Gwerz Koz Zant Ervoan*

DISKAN

Otro Zant Per, ni oll poaniet
Ebars kreiz trubuillo er bed
Evit kerzat oar hent an'ee
Krenvad, krenvad, krenvad hon fe.

I

Zant Per dre oll oar ann douar,
Zo meulet ha karget a c'hloar ;
Gant he c'hallout meurbet brudet
Pechou Satan a vo trec'het.

II

Jezuz a laras da Zant Per :
« Ma mignon te zo pesketaer,
« Gant da rouejo te dapo
« Ineo evit an' envo.

III

Neuze Zant Per a lavaras :
« Jezuz eo he-man, hon Mestr braz,
« Krouer an' env hag ann douar,
« Deomp gant-han betek ar gloar.

IV

« Gloar ar bed man a zo dister
« E-kichenn Jezuz ma zalver ;
« Jezuz hep-ken a c'hall rei d'in
« An' evuruzded zo ep fin.

V

Ho enor a zo braz meurbed
Prins evuruz ar bastoret ;
Ar c'hentan deus an' ebestel
Mignon Jezuz ho Mestr Zantel.

VI

Diaze an' Iliz Doue,
An' Ivern bemnoz ha bemde,
A droug hag a gonnar karget
A ra d'hac'h eur brezel kalet.

VII

Mes Jezuz a nevoa laret :
« Ker a nevo ann drouk-sperd
« Oar Ber ma Iliz me zavo
« Per a vo trec'h d'an' ivernio.

VIII

Evit hano ho Mestr Zantel
Dre oll d'ar gaou a ret brezel
Birvi a ra ho koad meurbed
'Vit gonid da Jezuz ar bed.

IX

'Vit diski d'hac'h hon c'harante
Ni a zo oll ho pugale,
Gant ho zikour hag ho pennoz
Ni a ielo d'ar barados.

X

« Me ho kar a greiz ma c'halon,
Lare da Jezuz, hon vatron,
« C'houi da behini neus kuzet
« Netra en env na bars ar bed.

XI

Gwech ha gwechall pad ho pue
A peus diskouet kals a fe
Evit Jezuz-Krist ho Toue,
Hon Zoue hag hon Mestr ive.

XII

Diganac'h e c'houlomp ive
Breman ha pad hon oll bue,
Ar fe hag ar garante vraz
Reas deusoc'h eur Zant ken braz.

XIII

Evit diski d'imp pec'herien
M'ar m'eump bet eur mare anken,
Ar fe ze a neus bet kollet
Mes ken ken a meus-han kavet.

XIV

Me kant ha kant gwech en bue
A meus torret lezen Doue,
Mes pa zellan ous ma Vatron
Ar c'honfort a teu en c'halon.

XV

Evel Zant Per, hon Vatron mad
M'ar offamsomp Doue hon Tad,
Ni a laro a greiz kalon :
Jezuz hon Mestr : pardon, pardon.

XVI

Otro Zant Per, porjer an'ee,
Otro Zant Per, mignon Doue,
Pedet stard ar Werc'hes Vari
He mab Jezuz d'hon fardoni.

XVII

Dre ho peden nerzuz meurbed,
Goulennet digant Mestr ar bed
Eur lec'h evidomp bars an'ee
Da ganan meulodi Doue.

J.-M. TH.

Imprimatur :

Brioci, Die 4^e Decembre 1902.

M. LE PROVOST,

Vicaire Général.



XIV

Die Kant in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.
die in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.

XV

Die Kant in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.
die in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.

XVI

Die Kant in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.
die in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.

XVII

Die Kant in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.
die in dem Buch von den
A. 1800. 1801. 1802. 1803.

A. 1800. 1801. 1802. 1803.

Die Kant in dem Buch von den

A. 1800. 1801. 1802. 1803.

M. in dem Buch von den

die in dem Buch von den

Die Kant in dem Buch von den

A. 1800. 1801. 1802. 1803.